


8N3-4-027

# KANTIKOU

## KROAZIADUR AR ZAKRAMANT M. R. V.



Kantikou: bet savet • Kamp « Châteaubriant »  
gant an Tad Dorval, Rener Kroazidi an Naoned,  
ha V. Seite, Rener skol gristen Rosko



Imprimerie, 4, Rue du Château  
Brest

## WAR-SAO ! KROAZIDI

Paroles du R. P. Dorval.

TON : D'hor mamm santéz Anna...

DISKAN :

*War-sao ! Kroazidi Breiz  
Hor c'halon leun a feiz,  
Ma vo Jezuz, bepred,  
Gwir roue war ar bed.*

1. Kroazidi a bep stad,  
Kinnigomp holl ervât,  
Bemdez e pep amzer,  
Hor buhez d'hor Salver.
2. Da savetei ar bed,  
Hor pedennou, bepred,  
A savo d'an Nenvou,  
Gant hon holl oberou.
3. Da blijout da Jezuz,  
Hor Mestr Madelezus,  
Ni ray a galon vat  
Holl deveriou hor stad.

4. Gant Sakrifs ar Groaz,  
Ni a ginnigo c'hoaz,  
Hor poaniou da Zoue,  
Gant feiz ha karante.
5. Soudarded da Jezus,  
Gantan ni vo nerzus;  
Dre ar gommunion,  
Eman en hor c'halon.
6. Dever ar Groazidi,  
Eo ober pep hini,  
Sakrifsou e-leiz,  
Hep klemm, a-hed an deiz.
7. Mamm Jezuz, ar Werc'hez,  
Hor Mamm, hon Rouanez,  
A ouezo hon diouall,  
Ouz nerz hon techou-fall
8. Pedi, kommunia,  
En em sakrifa  
Ha beza ebestel  
A raimp betek mervel.

## PEP TRA DA JEZUZ

Ton : Jezuz peger bras ve...

1. D'eoc'h Jezuz, va dervez,  
Dre zaouarn ar Werc'hez,  
Ma tougo frouez mat ( bis  
Evit Doue hon Tad. ( bis
2. Kemerit va ene  
Ha va c'halon ive,  
Ma chomin yac'h ha pur,  
Sentus, laouen ha fur.
3. Kerkent ha goulou deiz,  
Evidoc'h, leun a feiz,  
E nij va fedennou,  
Diwar va muzelloù.
4. Labouriou, c'hoariou,  
Plijaduriou, poaniou,  
'Vel bleuniou gwenn ha ruz,  
A vezo da Jezuz.
5. Va sonjou penn da benn,  
Va c'homzou c'hoaz ouz-  
A vezo kinniget [penn,  
D'Hor Zalver benniget.
6. Er gêr evel er skol  
Er-maez evel ouz tôl,  
Atao e pep amzer,  
Pep tra 'vit Hor Zalver.
7. Hon oberou ken paour  
A vezo peziou aour,  
Pa vezint unanet  
Gant re hor Mestr karef.
8. Ganto, Jezuz, bepred  
A c'hello dre ar bed,  
Dasprena eneou,  
A savo d'an Nenvou.
9. Er bedenn, diouz an noz,  
Araok mont da repoz,  
Dre ober sin ar groaz  
E rin eur c'hianig c'hoaz.
10. Pa vezin o tiskuitz,  
Warnoun, evel ar gliz,  
E kouezo eus an Nenv,  
Grasou dispar ha krenv.

IMPRIMATUR :  
Quimper, le 22 Mai 1942.  
P. JONCOUR,  
Vic. gén.

TAD DORVAL HA SEITE

# WAR ROUDOU JEZUZ

TON : *Eurus an hinl..*

DISKAN :

*Jesus deskit d'in ar pez a zo ret  
Evit chom ganeoc'h, unanet bepred. (bis)*

1. Kroaziad, sav da benn, ha sell ouz va C'hroaz;  
Ruziet gant va gwad, te am gwelo c'hoaz.
2. Gouzout a rez mat an holl drubuilhou  
Am eus gouzanvet vit da bec'hejou.
3. Eveldou, gant joa, hep klemm, hep truez  
Te a c'houzanvo poaniou da vuhez.
4. Poaniou a hep seurt, re vihan, re vras;  
Da sikour a rin, atao, gant va gras.
5. Kroaziad, kement tra a zispiljo d'it  
Evit plijout d'in, a vo graet ganit.
6. Ganin e teski e kêr Nazared  
Ar mod da senti ouz da dud karet.
7. Deskit ri ganin, an doare gwella  
Da santifia an traou distera.
8. Bemdez te a ray gant kalz a breder,  
Labour vat er skol, setu da zevel.
9. Da holl gentelio, desket mat atao  
Ha da zevelio a vo skrivet brao.

10. Ouz da vestr er c'hlas e taoli evez,  
Outan e senti, prim, gant levez.
11. Aliez ez i betek an iliz;  
Kinnig eno d'in kement sakrifik.
12. Da sakrifikou, mesket gant va gwad  
A vo ganin-me, kinniget d'am Zad.
13. Bez e vezi mat ouz an holl dud keiz,  
Aluzen a ri, alies, gant feiz.
14. Mat e vezi c'hoaz ouz kamaraded,  
D'it e vezint holl vel breudeur karet,
15. Renta servichou ha plijout d'an holl.  
A vintin da noz, a glaski dreist holl.
16. Chom a ri dalc'hmat, didrouz, en da renk,  
Den ne dle ganez klevout eur ger trenk.
17. Da c'hinou a vo eur feunteun dour-red :  
Ne deuy anezan ger gaouiat ebet.
18. Lenn a ri, er gêr, bemdez, diouz an noz,  
Buhez kaer ar Sent, evit hon tud koz.
19. Brezel didruez hep fallgaloni,  
A ri d'ar pec'hed, lorgnez, loustoni
20. D'az poazamanchou ha d'az plegou fall.  
Bemdez, hep paouez, e ri kement all.
21. Evit dont d'am heul selaou va ad :  
Bemdez e pedi ar Werc'hez Vari.

## KOMMUNIA ALIES :

Ton : *Pegen kaer ez eo Mamm Jezus...*

1. — *Ar c'hrouzour :*

- Gwerc'hez Vari, ô mam ken mat,  
Breudeur bilan omp-ni d'ho Mab,  
Ha c'hoant hon eus outan-tostaat.

*Ar Werc'hez :*

- Krogit em dourm, va bugale,  
Ha me ho reno hep dale,  
Daved Jezus, va Mab Doue.

2. — *Ar c'hrouzour :*

- Allaz! Mamin ger, ne gredomp ket  
Mont da reseo Salver ar bed,  
Rak alies hon eus pec'het.

*Ar Werc'hez :*

- M'hoc'h eus pec'het, gwelout a ran,  
Bremen hoc'h eus eneou glan :  
Gwalc'het int bet er Sakramant.

3. — *Ar c'hrouzour :*

- Kredi a reomp ar Salver eo,  
D'hon eneou ar bara beo ;  
Penaos, avat, mont d'e reseo?

*Ar Werc'hez :*

- Alies mat, c'houi holl a dle,  
Dre garantez ha gant feiz krenv,  
Reseo Jezuz, Bara an nenv.

4. — *Ar c'hrouzour :*

- Evel hor c'horf pep krouadur,  
Hon ene ivez a-dra-zur,  
A dle reseo e vagadur.

*Ar Werc'hez :*

- Jezuz a zo magadurez,  
D'an eneou e ro buhez,  
Sklerijen, nerz ha levenez.

5. — *Ar c'hrouzour :*

- Ni garfe holl, Mamm druezus,  
Reseo bemdez ho Mab Jezuz,  
Met ni a zo ken diegus !

*Ar Werc'hez :*

- Evit terri ho plegou fall,  
Ober ar vadi ha chom divrall,  
Kommunia c'houi dle gant mall.

6. — *Ar c'hrouzour :*

- Penaoz ober, o Mamm ken mat,  
Da blijout da Zoue hon Tad,  
Ha bale war roudou ho Mab?

*Ar Werc'hez :*

- Evit heulia Salver ar bed,  
Ansav ar feiz hep mez ebet  
Kommunia zo eun dra ret.

7. — *Ar c'hrouzour :*

- Evit diskouez e c'hoant vrasa,  
Da c'hellout bemdez hor maga,  
Eo en em guzet er bara.

*Ar Werc'hez :*

- « Debrit va c'horf, evit va gwad »  
En deus lavaret d'eoc'h va Mab,  
Setù e c'hoant, sklêr hag anat.

8. — *Ar c'hrouzour :*

- Evit beza war an aoter,  
Unanet start gant hor Salver,  
Kommunia zo ret ober.

*Ar Werc'hez :*

- Deuit gamin, kroazidi geiz,  
Daved Jezuz, nerzus ho feiz,  
Hag e nijoc'h d'an Nenv eun deiz.

# ROUANEZ AR GROAZIADUR

TON : *Patronez douz ar Folgoad...*

DISKAN

*Rouanez ar Groaziadur,  
 A galon ni ho ped ;  
 Selaout ho krouadur,  
 A! n'hon dilezit ket.  
 Ho karet, c'houi ha Jezuz,  
 Setu hor c'hoant dreist holl;  
 Ganeoc'h, Mamm garantezus,  
 Nikun n'ez a da goll.*



Mamm Jezuz hon Dasprener,  
 C'houi eo ivez hor Mamm;  
 Mirit d'eomp-ni, Mamm dener,  
 Hon enecou divlamm,  
 Ma c'hello ho pugale,  
 Da heul Jezuz o breur  
 Kenderc'hel start da vale,  
 Hirio, atao, bep eur.

Alies ni vo gwelet,  
 En iliz hag er gêr,  
 O lâret hor chapeled,  
 E-harz ho treid, Mamm gêr.  
 Pep Ave war bep greunepn,  
 A vezo d'eoc'h, ô Mamm,  
 Ken alies a vleunvenn:  
 Ré ruz, re wenn, re flamm.

Dirazoc'h, Mamm venniget,  
 Ho pugaligou geiz,  
 A zo laouen daoulinet,  
 Ho pedi reont gant feiz.  
 E-vito eo eun dudi  
 Hag ivez eun eutvad,  
 Hirgara mil meuleudi,  
 Da Vari ha d'he Mab.

Pa nij d'an Nenv hon ave  
 Ho pennoz, evel glao,  
 A gouez war ho pugale,  
 Niverusoc'h atao.  
 Ni zougo ho skapular.  
 Hag ho metalenn wenn,  
 Ganto ez eo eun drugar  
 Kas labour vat da benn.

O dourn krog en hoc'h hini,  
 C'houi, Mamm, a reno sur,  
 Da Jezuz, ho Kroazidi,  
 O ene krenv ha pur  
 A! grit ma c'hellint bemdez,  
 Drezoc'h, 'n eur galon c'hlan  
 Digemer, gant levez,ez,  
 Ho mab er bara-kan.

Da Jezuz ha da Vari,  
 Hor c'halon, hon ene  
 Hon labour hag hor c'hoari,  
 Da c'hounit d'eomp an Nenv,  
 Ni boanio ivez, gredus,  
 Da c'hounit ar re all  
 D'ar Werchez ha da Jezuz,  
 En despet d'an diaoul fall.